

TRUEZ, GWERC'HEZ VARI!**KANTIK AR VREZEL**

Gwerc'hez Vari, daoulinet holl dirag ho skeuden,
Ni ho ped da rei skoazel d'hor bro ger en anken :
Viktor ha peoc'h goulennit digant Doue dez-hi...
He stad a zo gwall boanitus : truez, Gwerc'hez Vari!

Gwerc'hez zantel, Rouanez an Nenv hag an douar,
Gwelit : hor Breiz 'zo beuzete r'c'haonv hag e r'c'hlac'har-
Bro Frans, Merc'h hen' an Iliz, a zo braz he enkreiz...
Plou' zeul 'ta d'ho frealzi nemed-hoc'h c'hw!, Gwerc'hez ?

Ia, Mam, gant tud digalon hor bro gaer 'zo breset, -
O d'euz, n eur zond d'he gwaska, great kant ha mil torfed...
Pegoulz 'ta, Mam a druez, e reot d'an dud fall-ze
Dizret d'ho bro ho-hunan, trec'het gant hor c'hleze ?

O Mam, evit hon difen a-eneb al laeron,
Holl hor breudeur : d'euz redet, gras Doue n ho e'halon,
Evit ar Frans, ho mam-vro, prest da rei ho buhez...
O Mam, klevit hor peden : varn-ho beillit bemdez !

Stouaz e-kreiz ar stourmad, kalz dija zo maro :
Ma 'z aint buhan d'an Nenvou, Mam, pedit evit-ho!
Pedit e'hoaz vit ar gragez, mammou ha minored
O d'euz kollet e'r vrezel ho zad, mab pe bried!

Oh! gloar d'an Drinded Zantel, tri Ferson e Doue,
Ha gloar d'ar Werc'hez Vari, Mam Jesus hor Roue!
Ra zeul' an holl d'Ho c'hared, ha dre-holl ha bemde,
Ma 'z atmp' kevred d'Ho meuli d'ar Baradoz goude!

AMEN.

POST † CARD

Ce petit cantique, composé par le R. P. TREBAOL, O. M. I.,
a été approuvé par l'Autorité diocésaine de Quimper.
Il peut se chanter sur l'air de *Santez Mari, Mam Doue, e peb
amzer Gwer'hez* (Kantikou Eskopti Kemper, Ton N° 55).
S'adresser (30 c. la douz.) à l'Interpr. G. M. TREBAOL, O. M. I.,
Area Commandant's Office, Rennes-sur-Nord, France.